

Klemmou Græg al Lounker

I

Me gave d'in guech dimezet
Julic ar ververo !
Ne mije great netra ebet
Juli vertonti, Juli vertonton !
Julic ar ververo !
Daoulagad ar c'huil dero !

II

Pa dal e rankan ober tout
Julic ar ververo !
Ober crampoez hag aoza iod
Juli vertonti, Juli vertonton !
Julic ar ververo !
Daoulagad ar c'huil dero !

III

Hag ar pezh a zo goassoc'h c'hoaz
Julic ar ververo !
Eo pilad lann gant va zreid noaz
Juli vertonti, Juli vertonton !
Julic ar ververo !
Daoulagad ar c'huil dero !

IV

Dimezet oun d'eun ever guin
Julic ar ververo !
A ia d'an davarn bep mintin
Juli vertonti, Juli vertonton !
Julic ar ververo !
Daoulagad ar c'huil dero !

V

Ar guin a ev' leiz he veren
Julic ar ververo !
N'eo ket guin ruz, mez guin melen
Juli vertonti, Juli vertonton !
Julic ar ververo !
Daoulagad ar c'huil dero !

VI

D'an davarn e za mintin mad
Julic ar ververo !
D'ar gear e teu gwal-divezad
Juli vertonti, Juli vertonton !
Julic ar ververo !
Daoulagad ar c'huil dero !

VII

Neuze 'commans al langachou
Julic ar ververo !
Ar mallosiou, ar bac'hadou
Juli vertonti, Juli vertonton !
Julic ar ververo !
Daoulagad ar c'huil dero !

VIII

Ne glevan ken nemed : « Kea kuit !
Julic ar ververo !
An ti 'zo d'in, ar 'meaz zo d'id
Juli vertonti, Juli vertonton !
Julic ar ververo !
Daoulagad ar c'huil dero !

IX

An dud iaouank pa zimezont
Julic ar ververo !
Ne ouzont ket petra 'reont
Juli vertonti, Juli vertonton !
Julic ar ververo !
Daoulagad ar c'huil dero !

X

Merc'hed iaouank, dizemez c'hoaz !
Julic ar ververo !
'Barz dimezi grit mad ho choaz
Juli vertonti, Juli vertonton !
Julic ar ververo !
Daoulagad ar c'huil dero !